



Rener·ez skol kentañ derez (Orvez)

Offre d'emploi publiée le lundi 09 septembre 2024

Localisation : **Orvez**

Poste en **CDI** H/F

Genver 2025

Description du poste

Da geñver raktres digoradur ur skol e Orvez (44) emañ Diwan o klask ur rener·ez skol kentañ derez.

Ouzhpenn ho kefridioù kelenn e vo fiziet ennoc'h atebegzh ar vuhez skol, al lusk pedagogel hag aozadur ar c'huzul-skol.

Kendivizer·ez ar familhoù e voc'h hag oberiant e voc'h e buhez ar skol hag he aozadur asambles gant an AEP (kevredigezh desevel poblek) a zo e karg eus merezh ar skol.

Ambrouget e voc'h en ho kefridi gant servij pedagogiezh ar c'hentañ derez ha kargadez a gefridi ho korn-bro a ambroug an AEP ivez.

Doare den

- Oadet a 21 vloaz d'an nebeutañ ;
- Bezañ tapet un diplom live 5 (BTS, DUT, DEUG, DEUST, etc.)
- 5 bloaz a skiant prenet renerezh, kelenn pe evezherezh en ur skol publik pe brevez.
- Digor eo ar post-mañ d'ar skolaerien·ezed statud prevez, anvet "skolaerien·ezed titlet Diwan » hag ar skolaerien·ezed dindan statud gwazour·ez publik ar Stad, anvet « skolaerien·ezed DS » a zoug d'an divizoù meneget amañ dindan.

Expérience et compétences requises

1. Divizoù lakaet da dalvezout evit ar skolaerien·ezed statud prevez, anvet « skolaerien·ezed· titlet Diwan » :

- Post leun amzer da bourveziñ d'ar 1añ a viz Genver 2025 ;
- Ouzhpenn ho kopr evit ho kargoù skolaer·ez hag an emglev lakaet e pleustr evit goprouñ renerien·ezed ar c'hentañ derez o talvezout e Diwan e vo paeet deoc'h un arc'hopr renerezh bloaziek a 2 599,12 € kriz ;
- Ouzhpenn an adc'hopr-mañ stag ouzh ho kefridi renerezh e vo paeet deoc'h un adc'hopr divoutin digoradur skol a 2 000 € kriz bloaziek.

2. Divizoù lakaet da dalvezout evit ar skolaerien·ezed statud gwazour·ez publik ar Stad, anvet « skolaer·ezed DS »

- Post leun amzer da bourveziñ d'ar 1añ a viz Genver 2025 ;
- Ma vezit dibabet evit ar post hag evit bezañ lakaet war bost e rankoc'h sevel ur goulenn bezañ lakaet e-maez a garg evit un abeg hiniennel ouzh rektorelezh emaoch stag outi
- Gwarantet e vo gant Diwan ho kopr war ziazez ho feur tapet a-raok bezañ bet lakaet e-maez a garg ha se betek ma vo kevratet ar skol.
- Ouzhpenn ho kopr evit ho kargoù skolaer·ez hag an emglev lakaet e pleustr evit goprouñ renerien·ezed ar c'hentañ derez o talvezout e Diwan e vo paeet deoc'h un arc'hopr renerezh bloaziek a 2 599,12 € kriz ;
- Ouzhpenn an adc'hopr-mañ stag ouzh ho kefridi renerezh e vo paeet deoc'h un adc'hopr divoutin digoradur skol a 2 000 € kriz bloaziek.